



ME DA GARO BEPRED, BEPRED

Son nevez
savet gant ar barz Kastellad Francis Moal
(Alc'houeder Leon)

I
Abaoue m'am beuz kavet eur vestrez,
Pegen laouen e vezan me bembdez
Va spered, nag en zo disoursi,
Noz deiz e maoun e sonjal ennhî,
Va c'halon e lamet a vez klevet.
Kement sonjal en va muilha karet
A dezi ne baouezan da gana
Eun diskan nevez ouz ar c'haera.

Diskan

Me da garo bepred, bepred,
Te gwella tenzor m'euz er bed,
Va c'halon gant kontantamant
Lamm evidot va dousik koant,
Te a zo ken karantezuz,
Ganen te a vezo eüruz,
Te eo va mestrez benniget,) (bis)
Me da garo bepred, bepred)

II

D'ar zul omp daou, pa vezer o pourmen,
Hor c'halonou neuze a vez laouen,
Pell diouz an trouz, ni vez er c'hoajou,
Eno vezer o kutuilh bleuniou,
Goude vez great eun tam marvailhaden,
Va mestrez azezet en va c'hichen,
Sellet ra neuze ouzin ker braoik,
Ma stagan da gana goustadik. (Diskan)

III

Eb dale, an dervez enem gavo,
A gant va dousik me a zimezo,
Vid'hon neuze na kaera dervez,
Pa c'hellin kousket gant va mestrez,
Ni vezo eüruz en hor tiegez,
Gant kouraj ni labouro assemblez,
A keit a ma chomo ganeomp iec'het,
Bemdez e kana me vo klevet. (Diskan)

(Reproduction interdite.)

Francis MOAL.